


AR
BUGUEL FUR.



E MONTROULEZ
E ty LÉDAN, Imprimer-Librer.

XIX H/5

E MONTRouLEZ,
E ty LÉDAN, Imprimer-Librer,
Ru ar Pave.
1872.



DIALOG

ETRE UN DOCTOR HAC EUR BUGUEL

BONJOUR, Mabic : pelec'h it-hu?

AN DOCTOR.

Da glasq eur Mestr e zàn eun tu?

AR BUGUEL.

Me zo doctor, ha mar qerit,
Me rai scôl dec'h mar am pedi.

AN DOCTOR.

Bet oun er scôl gant Doctoret,
Ha tout o c'havàn borodet,
O clasq desqi da bep-unan
Ar pez na ouzont qet o-unan.

AN DOCTOR.

Petra na voar an Doctoret,

AR BUGUEL.

Meur a dra ne ouzont qet.

AN DOCTOR.

Ha te a voar mui egueto?

AR BUGUEL.

Mar qirit , di a zisputo.

AN DOCTOR.

Te da zisput ouz eun Doctor!

AR BUGUEL.

Ho respont a rin gant enor ;

Ha na offec'h goulen netra

Na roin rézon dec'h anezâ.

AN DOCTOR.

Piou en deus crouet ar bed-mân?

AR BUGUEL.

Nep a rêr Doue anezân.

AN DOCTOR.

Ha te voar petra eo Doue?

AR BUGUEL.

Allas! ne oun qet na c'houi ive.

Dre ar feiz deomp oll eo desqet

Qement a zo en deus crouet,

Var guement a zo eo souveren,

Da guement zo e courc'hemen;

An nep na zentont qet ounta

Ne vanq james d'o funissa.

Ouspen , e zeo universel ,
E c'hel tout , e zeo eternal ;
Mes ne ouffe den explica
Na renta rêson anezâ.

O altitudo! na ellomp qen :
Adoromp-êa hep e gompren.

AN DOCTOR.

Petra dle an oll da Zoue?

AR BUGUEL.

E zervicha corf hac ene.

AN DOCTOR.

Peur a penos er servicher?

AR BUGUEL.

Pa ra peb-unan e zever.

AN DOCTOR.

Petra eo dever peb-unan?

AR BUGUEL.

Dever an oll guitibunan.

AN DOCTOR.

Petra eo dever an Doctoret?

AR BUGUEL.

Pratica ar mad o deus desqet.

Rac inutil ha coll amzer
Eo desqi ar mad hep e ober.

AN DOCTOR.

Petra eo dever eur Buguel?

AR BUGUEL.

Desqi beza eun den santel.

AN DOCTOR.

Peur en em goll eur c'hrouadur?

AR BUGUEL.

Pa ro d'e dad displijadur.

AN DOCTOR.

Petra ra dezàn mont da goll?

AR BUGUEL.

Beza re lézet en e roll.

AN DOCTOR.

Pelec'h e tisqer follentez?

AR BUGUEL.

O henti goal gompagnunez.

AN DOCTOR.

Piou zo danjerus da henti?

AR BUGUEL.

Nep zo sujet da sotoni.

Dibaot buguel a hent tud sot,
Eus o sotoni ne zesq lod.

AN DOCTOR.

Piou a respont eus anezo?

AR BUGUEL.

Nep a zo tad ha mam dezo.

AN DOCTOR.

Petra eo dever tad ha mam?

AR BUGUEL.

Miret o bugale divlam.

AN DOCTOR.

Penos ec'h ellont-y ober?

AR BUGUEL.

Oc'h o suja da chom er guér.

Mar o lézont re da vale,
E vint libertin hep dale.

AN DOCTOR.

Peur e tleer o instrui?

AR BUGUEL.

Diouz o speret dre ma teui.

AN DOCTOR.

Peur e tleer o c'horija?

AR BUGUEL.

Pa zint bian, eas da blega.
Facilloc'h eo plega planten
Eguet na deo plega güezen.

AN DOCTOR.

Peur e tleer o dimezi?

AR BUGUEL.

Pa o deus oat ha fantazi.
Güell eo abret dimezi merc'h,
Eguet na deo caout quez varlerc'h.

AN DOCTOR.

An tad, ar vam hac int a dle
Ober stat eus o bugale?

AR BUGUEL.

Tad a ra stad eus e vabic,
En desq da veza mab prodig;
Ha mam a ra stat ouz he merc'h,
Peur-liessa a vouel varlerc'h.

AN DOCTOR.

An tad, ar vam, hac int a dle
Rêi o zraou oll d'o bugale?

AR BUGUEL.

Sotoni vras ve da eun den.
Discrégui ouz tout e voyen,
Ha rancout goulén goude ze
E ezomou ouz bugale.
Seantoc'h eo goulén oc'h tad,
Eguet dan tad goulén diouz mab,
Güelet hon-eus meur a exempl
Etouez tud ere ha tud simpl,
Ar vugale o cass-raetal
O zad, o mam d'an hospital.

AN DOCTOR.

Pe etre piou en tieguez
Ne vez nemeur a garantez?

AN BUGUEL.

Etre bugale ha lesvam,
Ispicial mar deu d'o blam;
Rac ar lesvam neo qet caret
A galon vad gant minoret :
Dibaot lesvam a gar ive
Bugale all qeit hac he re.

AN DOCTOR.

Ha te voar micher priedou?

AR BUGUEL.

Clévet e meus o doareou.

AN DOCTOR.

Peur vez carantez etreze?

AR BUGUEL.

Pa na zefot netra deze.

AN DOCTOR.

Ha peur e vanq an union?

AR BUGUEL.

Pa vanq dezo pourvision.

AN DOCTOR.

Ha peur e vezont e coler?

AR BUGUEL.

Pa vanq unan en e zever.

AN DOCTOR.

Piou a zo cassaüs d'an oll?

AR BUGUEL.

An diaoul hac eur vreg foll.

En eun dezert eo güell beza,

Ha caout eno peoc'h da veva,

Eguet n'en deo chom assambles

Gant greg ebet, mar deo folles.

AN DOCTOR.

Hac ar graguez a gar ar güin?

AR BUGUEL.

Eus an enor-ze n'int qet dign.

Eur vreg a zo custum da eva,

Eus a bep tout ne dal netra;

Oc'h peb honestis e serr dor,

Hac ouz peb pec'het e tigor.

AN DOCTOR.

Petra servij canna eur vreg?

AR BUGUEL.

Laqat e maliç da redec.

Ne zeus serpent danjerussoc'h,

Leon na dragon terruploc'h

Eguet eur vreg zo e coler;

Ouz e c'hanna zo mil danjer.

AN DOCTOR.

Pelec'h e cafet-hu eur vreg v

AR BUGUEL.

Dan eê e ranqer mont d'e c'h

AN DOCTOR.

Nac ar plac'het, va buguel qe:

Ha te c'heus ounte carantez?

AR BUGUEL.

Va zad en deus va c'helennet
Ne dostain james ouz plac'het,
Rac tromplus int calz aneze,
Ha collet ar bed-mâ gante.
O min a zo douç eguis mel,
Hac a zeboch meur a vuguel;
Mes ne vezet qet pell ganto
E guis ar vestl na dint c'huero.

AN DOCTOR.

Petra a ra da galz a dud
Divar o fenn caout mil disput?

AR BUGUEL.

Petra ma zeo an dud-se sot
Eus a vil maleur clasq o lot.

AN DOCTOR.

Ha te anav plac'h fur abet?

AR BUGUEL.

Na meus qet calz anavezet :
Ar plac'het fur, var a glévàn,
N'en dint qet commun er vro-màn.

AN DOCTOR.

Pe da lec'h eta int-hi ét?

AR BUGUEL.

Elec'h ne zeus qet a voaset.

Biscoas plac'h fur , fur na voe pell
O henti goas , na ne voe voell.

AN DOCTOR.

Ha ne dleer qet en em henti
Evit caout lec'h da zimezi?

AR BUGUEL.

Demezi a zo permetet ,
Mes sotoni eo qemeret
Eur plac'h e deus meur a c'halant ,
Hac eus an oll a zo contant :
Guell eo ganén caout eur mignon ,
Eguet eur plac'h en donézon.

AN DOCTOR.

Ha te c'heus calz a vignonet ?

AR BUGUEL.

Ne anzavàn mignon ebet.
Ar mignonet eus ar bed-màn
Zo inconstant var a glévan :

Dibaot a zen a ve tromplet
O re fiziout en mignonet.

AN DOCTOR.

Pegueit e pad ar vignoniach?

AR BUGUEL.

Beten'n ezom , pas davan'ach.
Nep en deus arc'hant hac o ro,
A gav mignonet e peb brô ;
Mar deu ezom dezàn goude,
E vignonet en dizene.

AN DOCTOR.

Petra ra nep a brest arc'hant
Da eur mignon , hep caout goarant?

AR BUGUEL.

C'hoant coll en deus , hervez feçon,
Hac e arc'hant hac e vignon :
Qendery gompez vi, pa bresti,
Ha den ingrat , pa c'houlenni.

AN DOCTOR.

An nep a ra eun donèson ,
Petra sònj-én en e galon?

AR BUGUEL.

Sònjal a ra en devezo
Daou c'hement mui eguet na ro;
Penevert se certenamant,
Nebeut a zen a rae presant.

AN DOCTOR.

Hac én zo den e nep canton
N'en deus adversour ha mignon?

AR BUGUEL.

Dibaot den a zo er bed-mâ,
N'en deus er c'har hac er c'hassa.

AN DOCTOR.

Pe diouz piou e ranqer tremen?

AR BUGUEL.

Diouz ar bed oll, mar be moyen;
Rac ne zeus den na ell ober
Ha drouc ha mad gant an amzer.

AN DOCTOR.

Pelec'h e sao disantion?

AR BUGUEL.

Elec'h ma vanq soumission.

An dud superb a zav atao
Eun disput benac etrezo,

AN DOCTOR.

Na pe ouz piou na ranquer qet
Caout james disput ebet?

AR BUGUEL.

Ne dleer caout gant hini,
Ma na ellet qet trec'hi.
Marc'h a resist ouz ar guentrou
A ra gaou bras ouz e gostou;
Ha sot eo den da resista
Ouz nep zo creoc'h egueta.

AN DOCTOR.

Penos e fach ar vignonet,
Na peur e vezont accordet?

AR BUGUEL.

Divar ar güin peur-liessa
E custumont en em facha;
Ha d'o accordi goude ze
E ranquer caout güin adare.

AN DOCTOR.

Ha te voar ives eva güin?

AR BUGUEL.

Re yaouanqic e c'hoas va mid.

Gant an Doctoret el'lezàn ;
A rai güell usach anezàn.

AN DOCTOR.

Nep zo pedet da eur banquet,
Ha n'eo get sot ma n'en da get?

AR BUGUEL.

Furroc'h è calz ma chom er guër,
Ma na voar eva dre voder.

AN DOCTOR.

Petra ra an hini a ev re?

AR BUGUEL.

Disqi d'ar bed oll e zoare.
Pa vez secret, mar bez mezo,
Qement a voar a lavaro,
Ha calz c'hoas avichou ouспен,
Pa zao e vanne en e benn.
Ar paoura tout, evet dezàn,
A zo pinvidic, emezàn ;
Ha gouscoude en devezs poan
O caout yod silet da goan.

AN DOCTOR.

Piou a ra d'an dud güella cher?

AR BUGUEL.

Nep en deus joa oc'h e ober.
Digant eur mignon eo güell caout dour
Eguet güin digant eun traitour.

AN DOCTOR.

Mar ez pe arc'hant, te efe güin,
Evit beza yaouanc da vin;
Mes n'elles eva nemet dour,
Abalamour ma zout paour.

AR BUGUEL.

Me ne meus nac arc'hant nac aour
Ha gouscoude ne dön qet paour;
Pinvidic òn coulz ha dicun,
Pa zòn contant eus va fortun,
Ha clêvet a meus e peb lec'h
Eo guell dour ha bara sec'h
Eguet caout arc'hant leis an ty,
Ma neo contant nep en deus-hi.

AN DOCTOR.

Piou a zezir ha nen deus qet?

AR BUGUEL.

Nep a frip ha ne c'honit qet.

Dibaot eo güelet eur prodig
O chom pell-amzer pinvidic,
Dibaot ivez eur feneant
A zestum calz eus a arc'hant.

AN DOCTOR.

Piou zo beo hac en defe naon?

AR BUGUEL.

Nep a chom re bel var e scaon.

AN DOCTOR.

Piou ne verit get a zicour?

AR BUGUEL.

Nep a zo crén, ma na labour.

AN DOCTOR.

Petra é avantach ar re baour :
Var nep en deus arc'hant hac aour?

AR BUGUEL.

Eun avantach hac a zo caer :
N'o deus get aoun rac al laer;
Rac ne veler get al laeron
O vont nemeur en o c'hanton.

AN DOCTOR.

Pelec'h eta e vezont-hi?

AR BUGUEL.

Elec'h ma santont eus ganti.

AN DOCTOR.

Piou a zo custum da laerez?

AR BUGUEL.

Nep en deus aon rac paourentez.

AN DOCTOR.

Ha cresqi ra ar voyen

O qemer madou an estren?

AR BUGUEL.

James den ne binvidica

Oc'h ober gaou ouz e nessa :

Ar madou drouc acquisitez

Na brospere gant den ebet.

AN DOCTOR.

Nac ar madou destumet pront?

AR BUGUEL.

Dissilla prest a gustumont.

AN DOCTOR.

Hac al laeron a ell miret

N'o defe get a boan speret?

AR BUGUEL.

Natur al laer eo beza lent,
Caout aon ha spont-pa za en hent,
E sònj dezàn e zeus bepret
Eur re benac oc'h e redet.

AN DOCTOR.

Pet seurt laeron zo er bed-mà?

AR BUGUEL.

Difficil ve o divera;
Rac ma ve an oll examinè,
Neubet a zen just a gafet;
Hac ar pez am eston muia,
Hac a ra poan din da sònja,
Eo ma renter en peb canton
Enoriou d'ar brassa laeron,
Hac eun nombr bras a re dister
Dirac an oll a bunisser.

AN DOCTOR.

Piou a gar enor er bed-mà?

AR BUGUEL.

An oll a zo contant anezà.

AR DOCTOR.

Piou a ra enor d'e nessa?

AR BUGUEL.

Nep en deus carantez ountâ :
Renta enor hep carantez,
Zo trahison pe traitourez.

AN DOCTOR.

Peur e chench an dud faltazi ?

AR BUGUEL.

Pa gresq ar madou en o zi.
Dibaot hini, mar deus nicun,
Na chench humor pa chench fortun.
Ar fortun vras, an enoriou,
Eus ar zent a ra diaoulou.

AN DOCTOR.

Nac ar re a glasq enoriou,
O publia o vertuziou ?

AR BUGUEL.

Dibaot ar yar na goll e vi
O çana re goude dezvi,
Ha dibaot den en em bempad
Na goll e boan oc'h ober vad.

AN DOCTOR.

Na te c'heus joa eus an enor ?

AR BUGUEL.

Ne glasqàn qet a zizenor.

AN DOCTOR.

Pe an enor pe ar madou
Eo ar güella euz a zaou?

AR BUGUEL.

Güell eo brud mad ha peb-ini
Eguet madou leis an ty.

AN DOCTOR.

Hac ar bed-oll a glasq enor?

AR BUGUEL.

Coulz an azen hac an doctor.
Dibaot an den, mar deus nicun,
A zo contant eus e fortun.

AN DOCTOR.

Petra a gredes-te eus an dud
A zo custum da gaout goall vrud?

AR BUGUEL.

Dibaot chiminal a vogued
Anez na ve tan en oaled :
Dibaot en deus goall renom
Na dê clouar ma na dê tom.

AN DOCTOR.

Pe oc'h tra ec'h eus-te joa?

AR BUGUEL.

Ous eun dra vad pa er gavàn.

AN DOCTOR.

Petra ar mad blij dide?

AR BUGUEL.

Beza bepret en graç Doue.

AN DOCTOR.

'A te ac'h eus c'hoarzet biscoas?

AR BUGUEL.

Ne gredàn get em be c'hoas;

Clêvet e meus o re c'hoarzin.

Na zuster nemet chagrin :

Goude c'hoarzia et teu guela,

Goude c'hoari, huanada.

AN DOCTOR.

Perac ma remerqer en peb den

Bremâ trist hac ember laouen?

AR BUGUEL.

Allas ! dre ar c'henta pec'het,

D'an inconstanç omp oll sujet :

Ha na ell den moralamant
Beza parfetamant contant,
Qen a ello evit biquen
Possedi ar mad souveren;
Rac bepret an adversite
Zo harp eus ar brospérité.

AN DOCTOR.

Ha te voar ive petra ra
Ma zeus calz contant er bed-mâ,
Ha calz all pere n'en dint qet,
Carguet a chagrin ho speret.

AR BUGUEL.

Ar stad en deus ar c'houstianç
Peurvuia a ra differanç,
Rac nep a vev en güir gristen
Zo paciant en e anqen :
Evel Job int contant bepret,
Er c'hlenvet coulz hac er yec'hët;
Bepret o deveus resignanç
D'ar gundu eus ar Brovidanç;
Mes er c'hontrol, an dud mechant
A zouffr atao diezamant,

AN DOCTOR.

Perac eta na chenchont-hi?

AR BUGUEL.

Difficil bras eo o distrei :

Coz guezen zo drouc da blega ;

Qent e torfe eguet eona.

Eun den yaouauc da fall pa za,

Ne voella qet evit cossa,

Pe mar chench eun draic benac,

Ne chencho qet a galon vad.

Eur c'hos louarn hac an dare ;

Güelet eur yar c'hoas a garre.

An nep na chench a vir galon,

A gar ar goal occasion.

AN DOTOR.

Me vel ervat, buguel yaouanc,

Ne zefot qet did a sqiant ;

Mes lavar din pez seurt micher

A guemeri gant an amzer ?

AR BUGUEL.

C'houi zo Doctor ha den savant,

Lavarit din ho santimant.

AN DOCTOR.

Me false din , pa zout habil ;
Rei did eun etat difficil.

AR BUGUEL.

Difficulte zo partout ;
Roit din unan eus va gallout.

AN L'CTOR.

Me vel ervat ne gares qet
Nac ar graguez , nac ar merc'het ;
Mar o c'harfes , e raes fortun
O temezi coulz ha nicun ;
Mes pa ne zint diouz da zivis ,
Ret eo did beza den a illis ;
Ha mar qeres , en eur redec,
Me tisgo da veza bêlec.

AR BUGUEL.

Eus a guementse n'on qet dign,
Ha ne garàn qet evan güin.

AN DOCTOR.

Petra vezi-de-ta , manac'h ?

AR BUGUEL.

Aon bras am be da gaout re veac'h.

Ar froc zo dies da zouguen ,
Ha me gred e zeus meur a zen
Ma c'halfent o chench ouz rochedou ,
A rafe franqis er c'houentchou.

AN DOCTOR.

Me vel ervat , diouc'h da humeur ,
Na vezi qet na Tad na Breur ;
Mes mar qeres da viana ,
Avocat ec'h elli beza.

AR BUGUEL.

Ma ven avocat , et ranqfen
Souten ar gaou hac e zifen ,
Ha rêi cuzul da bep-hini
Diouz e humor ha faltazi ,
Pe autramant em dismegañç
Chom hep pledi en audianç.

AN DOCTOR.

Petra vezi-te-ta , soudart ?

AR BUGUEL.

Ne zòn qet custum eus an art.

Ar zoudardet oll peurvuia
A zesq deboch , a zesq pilla ;

Honnes a zo eun etat fall ;
Ret é clasq din eur vicher all.

AN DOCTOR.

Pa na blij etat ebet dit,
Ret é din da gaç da hermit.

AR BUGUEL.

Roit eta din hermitach
Ne c'houlennàn qet davantach,
Rac evit chom etouez an dud,
Emeus aon bra n'am be goal vrud.

AN DOCTOR.

Pe seurt goal vrud a pezo-te,
Mar bevez mad hervez Doue ?

AR BUGUEL.

Ar bed oll a zo dicriet,
Ha n'o defe qet faziët ;
Ar véleyen coulz ha re all
A zo sujet d'an têdou fall ;
Ar venec'h en o c'hoùenchou
N'int qet exant diouz têdadou ;
Ar priedou, ha tad a mam
A zo bepret diandan o blam ;

Ar graguez qèz hac ar merc'het
A zo ganto disenoret ;
Mestr ha mestrez o tempesti,
Servicher o feneanti
Tud a justic o revina,
Ar varc'hadourien o trompla,
An dud-jentil o voal-drèti,
Ar baysantet o vurmuri ;
Ne zeus itron na demezel
A vez exant diouc'h o zrav el ;
Ar bed oll zo tud fall dezo,
Ne chommìn qet gante er vro.

AN DOCTOR.

Pa c'heus aon rac an tédou fall,
Me royo did eun avis all :
Studi caer a bez eun Doctor,
Den na doucho eus da enor.

AR BUGUEL.

An Doctoret coulz ha re all
A zo sujet d'an tédou fall ;
Enoret ve o c'halite,
Pa ne vet o superbite,

Hennes eo viç an dud savant,
Caout vanite eus o sqiant.

AN DOCTOR.

Va buguelic, fouetet viot,
Rac re scânvic e zoc'h a dêot.

AR BUGUEL.

Mar bezàn fouettet, me zo sur
Nep am fouetto ne vo get fur :
Perac fouetta eur buguel qêz,
Rac ma lavar ar virionez ?

AN DOCTOR.

Ar virionez a zo cassaüs.

AR BUGUEL.

Ia, da nep a zo cablus.
Ret eo lezel nep en deus gal
D'en em grafat ha da c'hrognal.
Nep a gunduo goal vuez,
A vezo flemmet alies.

Parlant a rit eus a fouetta :
Fouettit oc'h azen da guenta,
Ha mirit ho sqiant ganeoc'h ;
Me gavo güell Mestr eguedod'h.

FIN.

